

BLEUNIOÙ HAG AZENED AN ARVOR E PLENED-YUGON

NAON PLANTENNOÙ

Sarracenia, Dionaea, Cephalotus, drozera... E Plened-Yugon, e tier-gwer Alan Ripaud, e kaver un tri-ugent bennak a spesadoù plant kigezat deuet eus pep lec'h er bed. Sot-nay eo ar spluseger yaouank gante, ar pezh en deus sikouret anezhañ da vezañ trec'h war an aotegezh ha da vezañ en e vleud a-benn ar fin.

« Ar pezh a welit amañ zo sarracenia. Ar plant kigezat-mañ e stumm korzennoù n'o dez ket ezhomm da fiñval evit tapout amprevaned. Gant o livioù flamm hag o sun sukret e sachont o freizhoù a chom sac'het er « pechoù jarloù »-se ha goude-se e vezont goet gant enzimoù. » Pa vez kaoz gant Alan Ripaud eus plant kigezat e vez lañchenet mat ! Orin, bleuniadur, gounit anezhe... 20 vloaz zo dija ec'h eo sot gant ar plant-se, gant-se ec'h anavez pep spesad mat-tre. « 7-8 vloaz e oan pa'm boa pignet ma flantenn Dionaea gentañ en ur jardinerzh, a gont ar spluseger. Goude-se em eus lakaet ma dastumad plant kigezat da vrasaat. Da'm soñj on bet bamet o welet pegen kaer int, gant o stumm hag o livioù... ouzhpenn ar fed m'int kad da zebriñ amprevaned, evel-just ! »

STOURM OUZH AN AOTEGEZH

En ur vousec'hoarzhin emañ Alan o kerzhet trankil ha brav e-mesk meur a gant podad plant soubet en dour-glav, dindan an tri-zi-gwer en e spluseg Bleunioù hag Azened an Arvor, a oa bet savet e 2016. Ne weler e mod ebet en deus ranket kiañ muioc'h evit forzh piv a-hend-all evit en em gavout el lec'h m'emañ bremañ. Rak gant un aotegezh Asperger emañ Alan, ar pezh a oa bet diagnostiket pa oa-eñ 10 vloaz. « Pa oa bihan e oa tapet gant trubuilhoù en e skiantoù, e gousked hag e emzalc'h, eme Anne Mevel, e vamm. Start-tre e oa bet an traoù er skol, poan en doa o teskiñ ha ret e oa din bezañ paouezet da labourat evit sikour anezhañ diouzh argwellañ. »

Pa oa krennard e sante Alan e veze dousaet dezhañ e-mesk ar plant ha

« TREMENET OMP DREIST TOUT AR SKOILHOÙ »

neuze e krogas gant ur stummadur e lise liorzhouriezh Sant-Ilan e Langaeg. « Dedennet-kaer e oan gant an traoù bev, emezañ, met lusk al labour ne oa ket mat din. Ar stajoù a skuizhe ac'hanon ha komprenet em boa buan ne oa ket graet ar stalioù ordinal evidon. » Goude-se e voe ur mare ma oa bet o'n em soñjal da vat, oc'h esa labourat e DSSL hep ober berzh, o welet tud evit klask un hent hag a gordfe gant an dalc'h a oa gentañ. « Hag un devezh e oa bet lâret din, gant ur gelennerez e Sant-Ilan, dont d'al lise da werzhañ ma flantennoù, eme Alan

● PLUS D'INFOS

Fleurs et ânes
d'Armor
7 La Ville-Jehan
22640 Plénée-
Jugon.
Ouvert tous les jours
d'avril à octobre,
de 14h à 19h (sauf
exception, ne pas
hésiter à appeler au
06 66 23 22 98).

Anne et Alan devant
des sarracénias
en fin de floraison

en ur vousec'hoarzhin. Mod-se e oa lañset an traoù ! » Ha setu graet e soñj gant ar paotr yaouank, en ur ober un toulad devezhoù, sevel e spluseg dezhañ evit ar plant kigezat, ha neuze sachet e vamm gentañ d'e heul, o-daou entanet-bras. « Kement a nerzh a oa ganimp ken omp tremenet dreist tout ar skoilhoù, he deus soñj Anne. Gounezet e voe ar bank d'hon zu ha dastumet e voe 12 000 a euroioù dre arc'hantaouiñ a-stroll. Un istor bevet asambles gant meur a zen eo deuet da vezañ. »

C'hwec'h vloaz goude ec'h a plaen an traoù gant Alan hag Anne e Plened-Yugon, lec'h m'int staliet. « E-pad argoñv e vez tailhet ha rannet ar plant kigezat, e-kerzh an nevezamzer e vezomp war ar marc'hadoù evit ar plant ha degemeret e vez ar viziterien er spluseg e-pad an hañv », a zispleg Alan. War al lec'h-se, bet empentet evel ur feurm-diskwel (lec'h ma kaver azened, deñved, dañvadezed, maout hag all, kichen-ha-kichen gant plant kigezat), en deus kavet hervezañ ur mod « da vezañ en e vleud penn-da-benn ». Hiziv an deiz e vez kontant da gomz eus e skiant-prenañ asambles gant tud yaouank all, aoteien pe tud dalc'het anezhe, abalamour da « reiñ kalon dezhe ». ●

Virginie Le Pape

* ensavadurioù pe servijoù da sikour dre al labour, lec'h ma vez degemeret tud dalc'het



À lire en breton
et en gallo
sur cotesdarmor.fr/mag194

